

# CANTIC JUDAS

Var ton : *Al Labourer Sul ha Gouel.*

Me ho supli, compagnunez, tostoit oll da glêvet  
Buez an den maleürussa e voe biscoas var bed  
Pehini e deveus lazet e dad ha map ar roue,  
E vam bropr en deus eureujet, ha trahisset Mab Doue.

Ar scritur a deus da barlant eus a Judas ar mechant,  
Peheni a zo güir exempl d'ar bed oil entieramant.  
Da drec'hi an avaristet, eur pe'het qer malheureus,  
A zo caus eus a vii bec'het a fach hou roue Jesus.

Doue ebars en aviel a ro demp calz exemplou  
Da drec'hi an avaristet sourcèn an oll bec'hejou.  
Dreist pep tra e cavan merqet bue Judas ar mechant.  
Pehini zo en em daonet gant ar c'hoant da gaout arc'hant.

Pa voa e vam eus e zouguen, ar Profet e lavaras  
E devije eur c'hrouadur a raje dei anqen vras ;  
Discléri aenre en antier ha d'e vam coulz ha d'e dad,  
Penos e vije erruet er bed-man o mab eun den miserabl.

E dad hac e vam o clêvet eur c'hêlou qen dinatur.  
Petra a vije erruet er bed gant o c'hrouadur.  
A voe qer trist ha qer nec'het, m'ô deus sonjet en treze,  
En instant ma lije ganet, temet dean e vue

Er Judê erruet ganet, e guerent o deus sonjet,  
Ober souden eur vag brouan, hac enni e vae laqet  
Al lestr etre daouarn Doue da vont gant ar mor pirillu  
O sonjal en em disober eus den qer malheürus.

Doue ne felle qet dean veje bet périsset,  
Evit servichout da exempl d'an oil bete fin vag brouan,  
Ar môr, an avel an tourmant a gunduet a bet ;  
Hac en rentass savet en bordic eun enezen :

En enezen-ze e chomme eur roue eus an Egypt.  
Ha n'en bevoa e vugale qen nemet eur ma'uniq,  
O vea eun deiz o pourment, ha gantan tud e bales,  
E cavas ar vague brouan voa chommet touez an tréz.

Ar roue en deus commandet vont da velet petra voa ;  
En instant o deveus cavet eur c'hroudur ar c'haera ;  
Neuze rojot commandament demeus abers ar roue  
D'e gass d'ar pales prontamant ha savetai e vue.

Ar roue en deus er maguet, hac en devoa santimant  
D'e sesqui na den instrui, d'e ober eun den vaillant :  
Mes evel ma voa e galon douguet d'an avaristet.  
Na elle qet en nep fécon e zivoal diouc'h ar pec'het

Judas pa e bet commanceet da vont en oad a réson.  
A zant, e galou attaquet gant cals a ambition ;  
Arc'hant, rubanou, bizeyier, ha carcanou, ha perlez,  
Qument e elle da attrap a laere d'ar rouanez.

Mab ar roue a vo cossac'h un tamic eguet Judas,  
Ha pa velas e laeronci, e laras dean trist bras :  
Me a lavaro sur d'am zad penos e zoc'h o laerez,  
Hag a lacay ho corrija, ma na chençhit a vuez.

Ar roue p'en deveus gouezet al laeronciou mechant,  
En deveus an disseziet ha corrijet promptamant,  
Ha disclériet en guirone voa eur c'hroudur cavet,  
Penos e voa dre charite e voa bet gantân savet.

Judas a gonservas neuze en e galon cassoni,  
Ha maliç ouz ar prinç yaouanc, nelle qet e anduri ;  
O sonjal a voa heritour d'ar roue calz hac e vab,  
E qemeraz ur volonte d'e laza, ar miserabl

Eun devez pa oa disonjet on oll eus a guementse,  
E lavar dean an traitour : deut da vale ganen-me ;  
Pa voant eun nebeut erartet, er scoas gant eun tol bas,  
D'an douar en deus er pilet, hac en e voad er beuzas.

Ac'hane buan e tec'het, ha var boez e hent e yas,  
Hac, hervez comzou ar Profet, en evro ec'h erruas ;  
Memes er goær ma voe ganet e chomas da zervicha,  
Hep bea gant den anaveet, en hostiliri vrassa.

Evel ma voa eun den vaillant, tud an ty en estime.  
Hag a gonfie ennan arc'hant, pini allies a laere ;  
Pa vije casset da brena meur a seurt marc'hadourez  
E vire dean arc'hant, hac e tache da laeres.

Evestr a roas dean eur vech arc'hant evit prena frovez,  
E dad prop a voa jardiner, eno e yas da laeres ;  
E dad a erruas gantan, a gommanç d'er scandalat,  
Judas a guemeraz eur men hac er beuzas en e oad.

Al lezen demeus ar vro-se a condaone ar muntre  
Da zemezi d'an intanvez, evit buition scler  
Arpes a eruas neuze, rac Judas ha eureujas,  
E vam prob a voa intanvez, rac e dad eo a lasas.

Aben eun nebeudic amser m'oent-o daou assambles  
O conta o avanturiou, en eur doma eun nosves  
E vam, pini voa he bried, e deus anaveet e mab,  
Pini a voue outi ganet, en c'hoec'h bis var bep troad.

Hac hi o comman da grial . ô Doue, Crouer ar bed !  
Cetu accomplisset efa ar c'homzon eus ar Profet !  
Judas a guemeraz anqen en e galon gouscoude,  
Rac ne vouie qet e-unan en devoa grêt quementse.

Quittad a eure e bried, evit mont da redeo bro  
Ha quittad an douar Egypt, caus dean calz maleuriou.  
En eur vont, en deus rancontret Jesus, Redemptor ar bed  
O vale gant e Ebestei, lenn a barfet.

Judas, pa velas bor Zalver en em dolas d'an daoulin,  
Mar plichefe ganec'h va receo, emean, va Mestr divin  
Sellit ouzon dre ho true, me a zo eur pec'her bras,  
Hac e meus eur güir volonte evit antren en ho craç.

Jesus a lavaraz dean : quittat ar pec'het marvel.  
Pehini zo en da galon, a buez Abostol fidel ;  
Chom atao em c'hompagnunez, te a velo Mab en Den  
O vervel ebars er groas da brena ar bec'herien

Jesus pa voa deut an amzer d'ober a Redemption,  
A roas d'e oll ebestel ar goan ar gommunion :  
Güir exempl d'an oll bec'herien Judas en deus recevet  
An drouc-speret en e galon dre sonch an avaristet.

Jesus, goude ar gommunion, gant eur garante zantel,  
A guemer dour hac eur serviet, a voalc'h treid e Ebestel,  
Hep exanti memes Judas o lavarar gant douçder :  
Te, emean, am zrahisso, va Abostol infidel.

Pa voa êchu ar Goan Pascal, e yas Jesus or Zalver  
Varzu ar jardin Olivet da bedi e Dad Eternel :  
Judas an traitour qer cruel, a yas pront a dra certain,  
Vit ar som a drégont diner d'e verza d'ar Judevien.

Pa velas Judas ar boaniou a andure Mab Doue,  
E qemeraz eun dizesper hac a troublas e ene :  
Ma yas da guinig an arc'hant, hac e voe bet refuset,  
Hep ma conservas güir glac'har, an den miliguet,

Er c'hontrol, n'em abandonni a eure d'an disesper,  
Evel a ra meur a hini, hac a zisplich d'or Zalver ;  
Mon a eure d'en nem grouga dre arrach a guemenset  
Ar pezh zo caus ma zeo daont epad an eternite

Cetu ama-ta, Christenien, eun exempl eus ar c'haéra  
Evit renonç d'an disesper a caout ar glac'har brassa  
Goulennit pardon ous Doue hac o ped eur feis barfet  
Hac e zeot en fin ho pue da adori an Drindet.

## DISPUT HAC ENTRETIEN ENTRE AR JUIF-ERRANT HAC AR BONOM-MIZER

*Pere so-en em rencontret tos da Orléans, ha pere zo noz-de o vale ac'houdevez o daou assambles.*

Var ton : *Guërs ar Burete.*

Didostait, compagnunez a bep seurt qalite,  
Evit clêvet enn disput composet a neve,  
Gret etre an daou den cossa a zo var ar be f-mâ,  
Pere, allas ! a vevo beteg ar varn diveza.

Unan ane zo hanvet Isaac ar baleant,  
Eguile ar baourente, caus ar vil nec'hamant,  
Abalamour d'an anqen e laqa en or bro,  
Ar bed oll a dra certen a garfe ve maro.

Tost d'ar guær a Orléans int en em rancontret,  
Evel daou zen ancien int en em barlantet,  
Isaac a zonje dean e vo en ar c'hossa,  
Ha pa dal, en deus cavet c'hoas cossoc'h egueta.

Ar Baourente, p'er güelas en deveys lavaret,  
Bonjour mignon Juif-Errant, e pelec'h oude bet,  
Lavar din pes seur micher a res var ar bet-man,  
Meurbet out squis ha fatig; hervez m'en remercân.

Me zo nos de o vale, gant Doue condaonet,  
Abalamour d'ar pec'het meus dezan displijet ;  
Terrub bras è va anquen, deffot quittât ar bet;  
Qen a vo ar Varn general, allas ! ne varvint quet

Mes, va migon, eméan, biscoas ne meus cavet  
Qen cos a c'houi er bet man, daoust ma meus baleet,  
Me sonje voan a c'hossa a voa var ar bet-man,  
Ha pa dal, em eus cavet va far, va ar velan.

Sious din, va c'hrouadur, em e Baourente,  
Te zo c'hoas neve ganet e comparéon din me :  
Te lavar e mout er bed passeet trivarc'h cant vloa,  
Ha me zo pass-et pemp mill : pini eo ar c'hossa ?

Pa bec'has hon Tad Adam, o tisoboissa,  
En o dy e voen ganet ha cunduet ganta :  
Memes tra e vugale o deus bet va maguet,  
Hac ec'h eaperan er grain c'hoas bete fin ar bed.

Va zad cos, eme Isaac, p'omp en em rencontret :  
Livirit din hoc'h hano, pes seurt micher a ret  
Meurbet e zon estonnet ouz ho clevet brema  
Penos e zoc'h er bed-ma abaoue pemp mil bloa.

Ar baourente, emean, oun a viscoas hanvet,  
Ha va blijadur vrassa eo tourmanti ar bed ;  
Laqat béprêt an dizurs e quement plaç m'oun bet ;  
Caus oun eus a vil maleur, tad an oll grueldet,

Te a dle va anaout dreist oll dud ar bed ma,  
Rac abaoue ma zout ganet, e maou oc'h da heuilla ;  
Eberort e meus varnout p'eb seurt ingrateri,  
Paourente, chagrin, clenved a renn did anduri.

Mar de te eo an hini a dourmant an oll bet,  
Eo profit e vez maro, ha biqen ne vez bet ;  
Evidon-me, maleürus a voar man, sious din !  
Ec'heus uzet em andret re a ingrateri.

Breman, p'am anevezes, pella, affronter cos :  
En em deun pell diouzin, ha va lès da repos :  
O comprenn pe seurt annui am eus var an douar,  
Abaoue trivarc'h cant vloas a rez din calz glac'har.

Pa zono an trompillon d'ont d'or Varn general.  
Pa finisso ar bed-man, me quittayo ractal ;  
Evit ac'han da neuze, elles n'em resolvi  
Da anduri paourente, p'eb tourmant hac annui.

Te eo ar speret goassa a voe biscoas er bed,  
Ha an oll, bras ha bian, a zo ganez nec'het :  
Beteç an dud pinvidic hac ar varc'hadourien  
A zo ganete jenet qercoulz hac ar beorien.

Me gred ervad, va mignon. ar pezh a lavaret ;  
Noblanç ha tud pinvidic a meus me goal ozet.  
Ha ma ne gueront dioual ouzin-me noz ha de.  
E tostayo hep nebeut outo ar baourente.

Me a gav din eo güell zot ar zong ac'h eus te grêt :  
E ty ar re binvidic e vez güell gundnet  
Eguet e ty ar beorien, o tont d'o chagrina ;  
An darn vuia anezo no deus quet a vara.

Esper a meus d'a vonet var o zro hep dale,  
Etouez ar re binvidic me a rai eur bale :  
Mar gallon-me antreal eur veach en o zy,  
O deveo calz euz a boan bars m'o c'huitain mui.

Re fall eo quüiscamant, o cos affronter cos !  
E ty a re buissant biqen n'ho po repos :  
Ractal ma viot güelet o fallout antreal,  
An distera eus an ty a deui do chasseal.

Va entetit, ma mignon, me ya dre finess,  
Bep eun tamic d'ho c'havet en noz coulz hac en de,  
Pa ven eur vech antreet, ne qet æs va c'has quît ;  
Me avoar ober tud paour eus a re biuvidic

Te a zo eur goal draïtour, eun den pernicious,  
Eun affranter, eur mechant, hac eur malicious,  
Elec'h lezel tud ar bed ebars en o repos.  
E zont caus a vil maleur hac en deiz hac en nos.

An nep ne fell qet deze ec'h antrefen en o zi,  
Arabat bea prodig, na tam feneanti :  
En ty lod ec'h antrean ha a voar va c'hass quît,  
Am c'hass da dy ar re all hac am mir manific,

Eus a bers an drouc speret ez out te deut er bed  
En em denn pell diouzon, scüis on ouz da velet.  
Da viana, pa ouzuot va zourmant ha va oat,  
E poent dit, affronter côz, buan d'ham c'huitât ;

Na re gôs, na re yaouanc, nac an anaoudeguez.  
Na mignonet, na nep den na excusan james ;  
An neb a garo divoall ha laqat eves mad,  
Am c'hasso demeus e zouez, mar qeront labourat.

Rac se-ta, compagnunez, mar fell dec'h evita  
Ar Vizer, ar Baourente, divoalit piz outâ ;  
En Paris, Rom, ha Bourdel hac en Marseille è bet ;  
Mes ret eo e chassel adouez ar Vrettonnet.

An neb deus c'hoant da gaout Histor Bonom Mizer,  
A ello mont d'ho frena da dy an Imprimer.  
Er goær eus a Vontroulez, en traon ar ru ar Vur,  
Hac en devo ouz e len calz euz a blijadur.